

DISPUT

ENTRE AR BLĒI HAC AL LAER.

Var ton : Chanson ar C'hase.



BReonet, me ho supli, tostait da glèvet,
Ur chanson hac un disput a neve gomposet,
Var sujet daou adversour o c'hantron en ur c'hoat,
Arrêtet da ziscuiza en difin o marc'hat.

Evit rēi sclér da gompreñ, e zint daou bot subtil,
O hanoyou da gompreñ d'an oll a so facil :
Guillerm ar Blei eo hano unan demeus auè,
Al Laer , pe an domager a rēr deus eguile.

Arrêtit, asistantet, un nebeut da zelaou.

2

Hac e clêfot ar c'boncour hac ar finessaou
 Pere o deus invantet er phaë-mû entrezè;
 Arrêtit da ziscuisa, da c'hortos mont arre.

Al Laer.

Petra a glesqes amâ d'ar c'houls-ma eus an nos?
 Brema e tiefca beza peb loën en e repos :
 Spouronet e'heus a'chanon o velet an danvad ;
 Me zonje e voa êru an diaoul d'am c'herc'hat ,

Ar Blei.

Te a vel bremâ patant, inoçant mic'hiec ,
 Pa ma aze es qichen , petra neus da spontet ?
 Ha mar doude spouronet o velet an danvad ,
 Me a so qen estonet e compren es paqat.

Al Laer.

Ne qet ar boan dit, Guillou, dont d'am zizebljian ;
 Me meus ama un tam coat , ha mar en dispaqan ,
 A rei dit en em glenqa , pe me a so tromplet ,
 Ha partia gant da loën , pa c'heus-an bet tapet.

Ar Blei.

Me a meus bet peder gar evit en em zifén ,
 Ha c'hoas mar bêzan foulet e tiscueliu ouspen ;
 Me zispago ur rastel , ha mar ti crog ennout .
 A rai dit Trançiliza ha monet gant da rout.

5

Al Laer.

Hola! arrêomp bremâ, ha chanchowp a langach,
 Pa è guir e zomp daou botr o tibapr hor partach ;
 E lec'h dont d'en em gansa, bezomp camaradou ;
 Trugarecaomp Doue , pa zè bet mat hon tro.

Ar Blei.

Me raeus bet poan ha fatic o tont betec amân ,
 A dreus dre ar goaremou , ar c'hleuyou huellan ;
 P'am bezo gret d'al loën-mâ divisqa e jupen
 E rin ur pred excelant gantan qic hac esqern.

Al Laer.

Te n'en dout qet difficil ; te zêbr ar c'hic en cri ,
 Ha me , qent m'am bo bara a renqo vandanji ,
 Ar pez a meus qemeret divar goust va nessa ,
 Ha va brassa camarad a ell va zrahissa .

Ar Blei.

Ganeme sur va unan eo bet eruet qementse :
 Un nosvez dreist ar re-al e voan êt d'ar chasse ,
 Ha p'am boa sammet va bec'h hac e rentet er c'hoat ,
 E voen privet ha cannet vit ma zrugarecat .

Al Laer,

Qementse , va fot Guillou , n'en dê qet padet pell ,
 Goude es poa liberte adare da dec'hel ,

4

Ha me , m'ar ben prisoniet, a vezo condaonet
Evit ur pemp pe c'houec'h vloas , hep beza respectet.

Ar Blei.

Qent evit dispartia , mar qeres , sent ouzin ;
Cede aina un avis , qemer-hi diganen :
Chanch a etat a dlees , ha qemer un all vell ,
Au honnestis ar gouella vit cat peoc'h da vervel.

Pa vcant en creis o discours e zeus bet tremenet
Ur jandarm a biou de , hac en deus o spontet ;
E armou a luguerne , hac ar loar a voa sclêr ,
Hac a ras dê partial pepini en e affeir.


An den-ma voe estonet o velet o zamou
Placet gante var ar c'bleu , ha savet ar c'hernou ;
An dourni en dro dezan a rent o partia ,
En laqae da zonjal en e heur diveza.

Commanç a ra da grial ha da douet toue ,
Ha da lampat er voullen , ne vouye pellec'h yê ,
Bete banden e vrugou , dre an dour hac ar fanq ,
Evel un den en dije collet e zantimant ,

Pa zantjont e voa pellêt , e tistroont en dro
Etreze hac ar plac-mâ , da zama o behiou ;
Gant calz eus a blijadur ez int êt en o rout ,
Cetu deut o zro da vat , goude sonjal coll tout .

5

An hini en deus compost an disput a neve,
 A gustum , qent finissa , laret a belec'h ve :
 Yan ar Guen eo e hano' , domicil a Bleuyel ,
 Ha natif a Plougescant evit explica vel.



CHANSON,
 COMPOSET A NEVEZ
 VAR SUJET DAOU ZEN YAOUANC.

Var un ton nevez.

ER bêvar a C'henveur, er bloa pemp-varnuguent,
 E rimàn ur Chanson , evit rîi da entent ,
 Demeus un disparti entre daou zen yaouanq
 Pere zo acuzet dre un tol venjamant.

N'en deus nemeur a dud ebars en terrouer